

# CHANSON NEVEZ

## L'ENFANT PRODIGE

281 h

Ententit oll Bretonnet, har e glefet cana  
Buez ar buguel prodig, mar galan discleriat  
Plijaudr ho pezo sur mar quiris ententit  
Ha profitabl eo ive eur tad ha mam sena  
Cetu aman eun entier buez ar mab prodigue  
A voa en é liberte abaoné yaouankis  
E dad e vam eun leze da c'hoari ha trepas  
Diouz goal gompagnunez ous e thê pep den dioual  
Calz a dud zo er bed man ha ne soureiciadt quet  
Se a lech a tui madour pa ne gonezont quet  
Evit o drouz implija ne reont caz a ze  
Nep o deus e gounezet a deus bet poan gante  
Tad ha mam me ho suppli; ha mestr ha mestrezet  
Corrijet an dud yaouank ha dale hit e sujet  
Difenni oute ar guin ar c'hartou an dansou  
Cassit e d'an oferen ha d'ar c'hartetoismou  
Clevit oll tud pinvidic pa oc'h eus ar voyen,  
Corrigit ho pugale hac ho servicherien;  
Na roit quet liberte en yaouanquis de re  
Disquit deze oll abred da zervicha Doue.  
Grit deze monet bembe da glevet oferen  
A bella diouz ann den bep seurt goal blaneden  
Enni ez eus eun tenzor hac a zo caer meurbet,  
Repesantli passion hor salver benniguet  
Eman voa eun den yaouanc ha na re cas ebet,  
Pe a lec'h e sen madou pa n'o goneze quet  
Quer prompt evel ar grizill pe ar gliz e mis mae  
Vize ant arc'hant gantan, cher vad choari a re.  
Ur spac a amzer e voe e ty e tad maguet,  
Madou bras a zispigne ha na re cas ebet  
Gant ar c'hartou an dançou ar guin hac ar merc'het,  
O tispign en eun devez tostic da zaou c'hant scoet  
Ne voa nemet pemzec vla pa c'houlennas quenta,  
E Cartach diouz e tad ma carje e rei dezo  
Mes e dad a estime pa vije deut en oad,  
E teuje dezan squiant pelloc'h da evessat.  
E dad hac e vam bemde a bedé evita  
Jesus hac e vam mari da rei ar c'hraç deza,  
Da veza eun den honest ma oant y bet  
Evit quement m'er pedent onte né zenté quet.  
Eun devez e lavaras sur d'e vam ha d'e dad  
Mè renk hirio caout arc'nant evit ober cher vad,  
Mè a zo eun den yaouank eus a gondition  
Hac a renk ober cher vad gant an dud a feçon,

Pa voa pemp bloas varnuguen e lavaras d'e dad,  
Mé a rank caout va fartach breman en eur yalc'hat  
Mé a yelo da vele evit guelet ar vro,  
Ha ma cavan va fortun eun tu m'e c'hemero.

E dad a respont deza gant carante bepret  
Mé ro va bennos d'eoc'h gant caranté barfet  
Ho pezit song a jesus n'e ancounail quet,  
Ar c'homzou en deus ho tad alies lavaret.

Neuze e roas e dad dezan tregont mil scoet,  
En aour fin hac en arc'hant en eur yalc'hat contet  
Cetu aze ho partach pa fell dec'h hor c'huitat,  
Doue roi deoc'h e c'hrac d'ober eur veach vad.

mont a reas deus ar guer ep lavaret kenavo,  
E dad voa glac'haret a seuillet daelou,  
Mon a reas va e lerc'h en enchou  
Mes ne vele mui nemet e roujou.

Caout eur ra eur rout e batez e voa remarquabl bra's  
Ha en hoa goloet neuzet gant eur mein glas  
Mont ar ret bemde en eur lavaret e pater,  
Da voelet rout e vad evit caout ber an amzer,

Quenta repas a curé ar prodig obstinet  
Voa en eun hostaliri gant eur vanden merc'het,  
Servichet mad voe certain en deiz-se da goania  
Sonerien evit dansal, plac'h coant da servicha.

Pa vize compagnunez ous an daol azeet,  
E voa en e blijadur ha gontan ar merc'het  
Queit ha ma pad arc'hant cher vad a reu gantan,  
Plijadur bras a gavent ober goal anezan.

Poa dispignet e arc'hant e vije triste meurbet  
E lar d'he gompagnunez n'en deus liard ebet,  
Mes ractal e hostises dezan e deus respontet,  
M'o tivisco compagnun ma na ven-me peet.

Pa voa goastet e arc'hant ne voa netra chomet,  
E falle dezan c'hoari ober cher vad bepred  
Mes a dauliou queneudén e voe prest quempenet  
Tennet e vleo ouz e benn ha querquent divisquet.

Goude ma voe chassetez ous an hostaliri,  
Nen devoa quet a zillad nac a voed da zrebi  
Eun drue voa e glevet o crial e henchou,  
Gant riou ha naon en devoa goude e oll cheriou.

Neuze e tistroas ch'oas dar guer da dy e dad,  
Evit goulén da loja evel eun tremenipt  
En han Doue emezan m'ho ped hac ho suppli,  
Da loja eun tremeniat zo scuis ha na ell mui,

Pa voa lojet gant e dad nen anavez quet,  
En a ouye an doare mes n'en disquese quet  
Pa voant et oll da gousquet eu a gassas ganta,  
Vesseliou, aour hac arc'hant demeus ar re gaera,

Neuze en em gavas prest gant he hostaliri  
Hac en devoe évité da eva da dibri,  
Queit ha ma padfont outan bepred e re cher vad  
Mes ne badas quet pell bras ar vec'h-se ar valchat.

Neuze e voe tracasset injuriet gante  
Evel eur forban basnet voa da velet neuze.  
Hac o tonet da zonjal e voa eur pecher bras  
Pa voe bolonte Doue en em gonvertissas.

Pa zonjas en e vue e sellas ous an ée  
O sellet pebes fortun bèpred a rancontre  
Monet a eure neuze goud e voal vue  
Da evessa al loened o tistrei ous Doue.

Monet a eure neuze d'eun ty da servicha,  
Ma vije o bolontez da rei soulèn deza  
Me chomo da labourat en arat mar queret,  
Pe autramant m'e a yel da viret al loenet.

Neuze e laras dezan ar merer ac'hane  
N'anduran quet au dud scan a ve bet o vale,  
Me meus tud da labourat quement hac a so ret  
Nemet da viret ar moc'h mar querete chomet.

En han Doue emezan va mestr me o suppli,  
Mé-rai vel ma lavaret va mirit en ho ty  
Mar gallan ho servicha evel ma leveret  
Queit ha ma plijo ganec'h evit caout eun tam boed.

Neuze e zeas ar prodic da vessa ar moé'h se,  
O tout da gonsideri guechal en e arie  
En devoa gret cheriou mat ha droue distribuet.  
Ha brema en paourente n'en devoa na dillad na boed

Eun druez voa e glevet en noas bæo o crial,  
Gant paourentez ha fatic goude e reus fall  
Gant naon e voe surprenet quen a rancas dibri,  
En al laouer gant ar moc'h a bep sort loustonnit.

Guell ve da eun den carten beza nao de var yun  
Eguet ober re gorfat na beza disasun,  
Coll a ra e zantimant neuze gant re gorfat  
Ha m'ar caret e lezel e rai eun drouc benac,

Beza eseus debochet ha droue implij madou  
Ar mec'h et fall har ac guin zo caus da valeuriou,  
Ha goude ar foll dispign zeon d'en em gana,  
Cetu siouas maleuriou gond drouc implija.

Peguen lies a zen sur a zo var ar bed man,  
A zo bet pinvidic bras allas; zo paour breman  
Goude prodigalite, eva guin ha c'hoari,  
E vezo trist ar prodig ma na ve da zibri.

Goude e foll dispignou cetu en distroet  
Da veza den gracios, humbl meurbat ar parfat,  
Pa voa bolonte Doue en em gonvertissas  
Hac e teuas ar vech se d'ar guer morc'hedus bras.

Goude se en em rentas e quichennic e dad  
Hac e teuas da sonjal gant eur volonte vat.  
Autoou Doue emezan ha m'em be bardissan.  
Da vonet dirac'h va zad ha me quen direson

Mé a ya en han doue emezan antren,  
Deiz mat dec'h c'houi a bedan cetu ho coure hemen  
Cetu ho mab hivourdu lavaret mab ho poa,  
E vizen e paourentez ma ne garien noania,

Va mab me a zo joaus d'ho peza distroet,  
Meulet bremas a galon a Verc'hez benniguet  
Me am boa digant Doue pell a z o deziret,  
Evit clevet ho toare pelec'h e vyech et.

Me so ar maleurussa a voe biscoas er bed  
Eu hano Jesus ha Mari va zad var fardonet,  
Me meus goall distribriet ar pezh ho poa roet  
Din da ober va profit ma carien o miret.

E dad a laras neuze de oll servicherien,  
Ret eo laza eun oan laez eun och hac eun eujen  
Da ober eur banquet caer dam mab zo distroet,  
Ret eo dant va zud queaz va c'hoas d'he velet.

Cals a dud zo er bed ma evel ar mab prodig,  
Hac a zo mal ive ouz az falz pinvidic  
Er bed-man eo qevont ama o baradoes,  
N'o deveus sonj a Jesus nac e vam ar Verc'hez.

Me o suppli tud yaouanc a bep sort qualite,  
Tud a bep condition hac ar re coz ive  
Diouz goall gompagnunez da zioual bepred.  
Ar c'hoari an nozveziou ar guin hac ar merc'het  
Ar reze siouas a zo da galz occasion  
Da ober calz maleuriou hac o daonation,  
Coledet int noz ha deiz ebars en oc fechet,  
Pe eo gant calz o chelen en hent da veza salvet.

Ma caremp consideri en Mari Madalen  
Zo en em gonvertissat gant eur sermon hepquen,  
Ni ne reomp eas siouas evit clevet beude  
Sërmoniou buez ar Sent hac exemplou ive.

Allas! nac oferen bret na sermoniou ive  
Ne gar quet tud obstinet n'o deus doujanc Doue,  
Na cate eismou da sul eve da goueliou din  
Cetu siouas an henchou a gundu da goal fin,  
Diou consideration a ren-eomp da gavet  
Evit miret ouz an den ne ve quet condaonet,  
Ar c'henta caret Doue dreist madou ar bed man  
Dan eil aon rac an ifern a zo carguet a boan.

En han Doue cristenien greomp oll areson  
Da verc'hcz saer mam Jesus bemdez a vir galon  
D'hon el mat ha gardien dar zent har d'hor paeron,  
Zo hon guir adrocaudet dirac Roue an tron,  
Clevet oc'h ens an histoar ha mar queret miret  
Dians prodigalite dont da dioual pepret,  
Goulennomp digant Jesus hac ar verc'hez divin  
Ar c'hrac da vont de veuli er barados er fin.

Cetu aman hano ar composeur Jean-Louis Guyadert  
a ves cavet e lerc'h all pas ne vest quet er guer.